



Teuliad an deskidi

Anv hag anv bihan :

Kevredigezh :

Ar priziadennoù a vez savet gant ur bodad labour ennañ tud kaset gant kevredigezhioù ezel deus DAO, trugarez eta da :
Kerlenn Sten Kidna , KLT, Skol An Emsav ha Ti Ar Vro Treger-Goueloù.
Trugarez ivez d'ar strollad c'hoariva "Biz Ar Glav", Radio Kreiz Breizh,
Brudañ ha skignañ, Radio Kerne ha TES evit o sikour.

Ces évaluations sont mises en place par un groupe de travail composé de représentants d'associations adhérentes à DAO, merci à :
Kerlenn Sten Kidna , KLT, Skol An Emsav et Ti Ar Vro Treger-Goueloù.
Merci aussi à la troupe de théâtre "Biz Ar Glav", Radio Kreiz Breizh,
Brudañ ha skignañ, Radio Kerne et TES pour leur concours.



Priziadenn 2015

Live A2

Selaou – compréhension orale

Lodenn 1

Emaoc'h o paouez klevout kemennadennoù radio, respontit d'ar goulennoù amañ da-heul.
Vous venez d'écouter des annonces radiophoniques, répondez aux questions suivantes.

Kemennadenn 1 – Annonce N°1

A partir de quel mois Arwena souhaite-t-elle travailler ?	/1
Janvier <input type="checkbox"/> Mars <input type="checkbox"/> Juillet <input type="checkbox"/> Septembre <input type="checkbox"/>	
Depuis combien d'années Arwena est-elle secrétaire ?	/1
3 ans <input type="checkbox"/> 13 ans <input type="checkbox"/> 23 ans <input type="checkbox"/> 33 ans <input type="checkbox"/>	

Kemennadenn 2 – Annonce N°2

Combien coûte le kilo de pain ?	/1
4,20€ <input type="checkbox"/> 4,40€ <input type="checkbox"/> 4,60€ <input type="checkbox"/> 4,80€ <input type="checkbox"/>	
Quel est le n° de téléphone de Job et Bleuenn :	/1

Kemennadenn 3 – Annonce N°3

L'homme qui recherche l'âme sœur est-il :	/1
célibataire <input type="checkbox"/> divorcé <input type="checkbox"/> veuf <input type="checkbox"/> on ne sait pas <input type="checkbox"/>	
Quelle est la couleur de ses yeux :	/1
vert <input type="checkbox"/> bleu <input type="checkbox"/> marron <input type="checkbox"/> noir <input type="checkbox"/>	

Kemennadenn 4 – Annonce N°4

Dans quelle commune le groupe « Boulc'hurun » souhaite-t-il répéter ?	/1
Quel âge ont les membres du groupe ?	/1
Environ 16 ans <input type="checkbox"/> Environ 17 ans <input type="checkbox"/> Environ 18 ans <input type="checkbox"/> on ne sait pas <input type="checkbox"/>	
Quels jours de la semaine souhaitent-ils répéter ?	/1
lundi et samedi <input type="checkbox"/> mardi et vendredi <input type="checkbox"/> mardi et dimanche <input type="checkbox"/> jeudi et vendredi <input type="checkbox"/>	
Quel est le prénom du contact pour le groupe ?	/1
	/10



Priziadenn 2015

Live A2

Selaou – compréhension orale

Lodenn 2

Emaoc'h o paouez klevout 5 diviz, deoc'h da lec'hiañ anezho.

Vous venez d'entendre 5 conversations, à vous de les placer dans leur contexte.

	Conversation 1	Conversation 2	Conversation 3	Conversation 4	Conversation 5	
Départ de la route du rhum, Sant Malo						/2
Festival des vieilles charrues, Karaez						/2
Château des Ducs de Bretagne, Naoned						/2
Festival Interceltique, An Oriant						/2
Stade du Roudourou, Gwengamp						/2
						/10

Skrivañ - Ecrire

/10

*Al lodenn Skrivañ zo bet roet deoc'h war ur follenn distag.
La partie Skrivañ-Ecrire vous a été donnée sur une feuille séparée.*

Lenn – Lire



© MIGUEL GARCIA SAAVEDRA



eilenn ^o (où)	seconde(s)
kement-se	cela
an Douar	la Terre
bizeost	bissextile
padout	durer
koulskoude	pourtant, cependant
ouzhpennañ	ajouter
eurier(où)	appareil(s) indiquant l'heure
draen (drein)	bogue(s) (bug)
ar Genrouedad ^o	(l')internet
luziet	compiqué
a-raok pell	dans peu de temps

Un eilenn ouzhpenn e 2015

Gwech ha gwech all e vez bloavezhioù 366 deiz anezhe e-lec'h 365. **Kement-se** a c'hoarvez peogwir e lak **an Douar** 365,25 devezh evit ober tro an Heol. C'hoarvezet e oa e 2012 ha c'hoarvezout a raio adarre e 2016. Bloavezhioù **bizeost** eo anv ar bloavezhioù hiroc'h-se. Ne vo ket 2015 ur bloavezh bizeost met **padout** a raio pelloc'h **koulskoude**. Se zo kaoz e vo **ouzhpennet** un eilenn d'an dregont a viz Mezheven 2015 d'an holl **eurieroù** : horolajoù, montroù, pandulenoù... Pa oa c'hoarvezet e 2012 e oa bet **drein** war **ar Genrouedad** dreist-holl. **Luziet** a-walc'h eo ouzhpennañ un eilenn. Divizet e vo mar-teze echuiñ gant an dra-se **a-raok pell**.

Ober kousk-aez zo mat

Setu ar pezh a zo bet embannet nevez zo en ur **studiadenn** bet graet er Stadoù-Unanet : ober kousk-aez a zo mat evit ar yec'hed. Goude un nozvezh re verr pe un nozvezh fall da skouer e c'haller **difenn ouzh** ar **skuizhder** pe ar stres gant ur **pennadig** diskuizh tregont munut. Arabat kousket en tu all da dregont munut koulskoude, mod all e vo **trubuilhet lusk** ar **c'housked**. Doareoù all d'ober kousk-aez a zo ivez, ar c'housk "**prim**" da skouer : serriñ an daoulagad e-pad pemp munut evit **kas** ar skuizhder **kuit**. Na **chomit** ket **etre daou soñj** neuze, **goulennit groñs** ar gwir d'ober kousk-aez !



© lightwavemedia



kousk(où)-aez	sieste(s)
studiadenn ^o (où)	étude(s) (sur tel ou tel sujet)
difenn ouzh	lutter contre
skuizhder(ioù)	fatigue(s)
pennadig(où)	court(s) moment(s)
trubuilhañ	troubler
lusk(où)	rythme(s)
kousked	sommeil
prim	rapide, prompt, subit (flash)
kas	chasser
chomit etre daou soñj	hésiter
goulenn groñs	exiger

Lenn – Lire



Pep gwir miret strizh



kenweturañ	covoiturer, covoiturage
kenvageal	cobaturer, cobaturage
mennozh(ioù)	idée(s), projet(s)
digent	inédit (sans précédent)
ezel (izili)	membre(s)
kevredigezh ^o (ioù)	association(s)
bag (bigl)	bateau(x)
ober berzh	avoir du succès
gouestlañ da	consacrer à
a-drugarez da	grâce à
koulzad(où)	campagne(s)
arc'hantaouiñ a-stroll	financement participatif
bageer(ien)	batelier(s), plaisancier(s)

Kenweturañ ? Kenvageal !

Ur **mennozh digent** a zo deuet da bevar Breizhad yaouank hag a labour alies war enez Groe e-pad an hañv : kenvageal. Ne oa ket un dra aes mont d'an enezenn hervez Renaud Moy, **ezel** eus ar **gevredigezh** Cobaturage. Nebeut-tre a **vigi** a oa ha re uhel e oa ar prizioù. Ur bajenn Facebook zo bet savet gant Cobaturage ha **berzh** he deus **graet**. Divizet ez eus bet neuze sevel ul lec'hienn **gouestlet d'ar c'henvageal**. Evit se ez eus bet dastumet pemp mil eizh kant euro **a-drugarez d'ur c'houlzad arc'hantaouiñ a-stroll** [s.o. #brezhoneg niv. 6]. Prest e vo al lec'hienn adalek miz Ebrel. Aesoc'h e vo d'ar veajourien kavout **bageerien** evit mont eus Breizh da inizi Groe, Houad hag Edig.

Evit gouzout hiroc'h (adalek miz Ebrel) : www.cobaturage.bzh

Kwiz e brezhoneg d'ar 4 a viz Ebrel

Ouzhpenn pemzek vloaz zo e oa bet **roet lañs** d'ar **Skrivadeg** e brezhoneg gant Emglev Bro an Orient ha gant kevredigezhioù all goude-se. Bep bloaz betek 2014 e c'halle an dud **kemer perzh** en **darvoud**-se e pep lec'h e Breizh hag e Pariz. C'hoant o deus bet izili Deskiñ d'an **Oadourien** (DAO) da **adsoñjal** an emgav pouezus-se evit ar yezh. E-lec'h ur **skrivadenn** e vo aozet ur "c'hwiz" e brezhoneg d'ar bevar a viz Ebrel e Breizh a-bezh. Goulennoù diwar-benn **danvezioù** a bep seurt a vo : istor, **douaroniezh**, sportoù, yezh... Dre skipailhoù etre tri ha c'hwec'h den e vo c'hoariet : bugale hag oadourien, brezhonegerien **ampart** ha **deskidi**, an holl a c'hallou kemer perzh !

Evit gouzout hiroc'h : www.dao-bzh.org



© Sofi photo



kwiz(où)	quiz
reiñ lañs	lancer (une action)
skrivadeg ^o (où)	dictée(s) collective(s)
kemer perzh	participer
darvoud(où)	événement(s)
oadour(ien)	adulte(s)
adsoñjal	repenser
skrivadenn ^o (où)	dictée(s)
danvez(ioù)	sujet(s), matière(s)
douaroniezh ^o	géographie
ampart	habile, confirmé
deskad (deskidi)	apprenant(s)



Priziadenn 2015

Live A2

Lenn – Lire

Goude bezañ lennet an div bajenn tennet eus #brezhoneg, ar gelaouen evit an deskidi embannet gant Skol An Emsav, respontit d'ar goulennoù amañ dindan.

Après avoir lu les 2 pages tirées de #brezhoneg, le magazine pour les apprenants de breton édité par Skol An Emsav, répondez aux questions ci-dessous.

Dites dans quel article il est question de

	Un eilenn ouzhpenn	Ober kousk-aez zo mat	Kenwetrñ ? Kenvageal !	Kwiz e brezhoneg	
Santé					/1
Création d' un site internet					/1
Jeu en breton					/1
Années bisextiles					/1
Dictée					/1
Bug informatique					/1
Iles bretonnes					/1
Sommeil					/1

Répondez aux questions

Quelle somme a été récoltée pour mettre en place un site internet ?		/1
Qui a eu l'idée de créer un site de cobaturage ?		/1
Quelle est la dernière année qui a été rallongée d'une seconde ?		/1
Quelle journée de 2015 sera rallongée d'une seconde ?		/1
Quelle est la durée idéale d'une sieste ?		/1
Dans quel pays a-t-on fait une étude sur les vertus de la sieste ?		/1
Qui avait créé la dictée en breton ?		/1
Qui peut participer au Kwiz ?		/1
		/1
		/1
		/1
Combien de membres devront compter les équipes pour le Kwiz ?		/1
		/20